

Mirdi Pont-Aven



Rez-an-douar

Donemat

Demat ha donemat
deoc'h.

Marteze e ouzit emaoc'h
amañ en ul lec'h hag a
oa gwechall un adti d'ul
leti, Leti Julia... Setu
m'emaoc'h-c'hwi e-giz ar
veajourien, an arzourien
en em gave en hor c'hêr,
c'hoant gante d'ober
anaoudegezh gant
lec'hioù ha livioù nevez...
Hag emichañs e
c'hallimp lakaat
ac'hanoc'h da santout ar
fromoù dispar a zeu
diwar o oberennoù a zo
gwriziennet ken don e
bro Pont-Aven. Taolit
evezh mat : lod anezhe
na vezont ket diskouezet
dalc'hmat abalamour da
virout anezhe e stad vat
pe abalamour ma vezont
prestet da virdioù all.

Evit kregiñ gant ho
kweladenn, kit gant ar
skalieroù pe gant ar
bignerez betek an estaj
kentañ hag ar sal Julia,
a oa gwechall sal-
debriñ al leti.




Estaj 1^{añ} Sal Julia



Estaj 1^{añ}

Sal Julia



aze emaoe'h

Amañ emañ neuze al lec'h ma veze debret e Leti Julia ; miret he deus ar sal-mañ he neuz orin met ne c'haller ket mont enni atav rak dalc'het e vez abadennoù ha predoù enni ivez.

Emaomp o komz deoc'h eus ul leti, met gwir eo emaoe'h en un adti hag a oa modernoc'h hag aesoc'h d'implijout eget al leti e-unan, a oa erru re vihan. War ar blasenn a veze graet plasenn ar Marc'had anezhi emañ, plasenn Julia hiziv an deiz.

Pa oa bet echuet sevel an adti e 1881 e seblante, gant e framm dir, bout ken modern hag ur skraber-oabl eus Chicago. Staliet e oa bet ennañ an holl aezamantoù a c'halled kavout e fin an XIXvet kantved : arrebeuri aes, tredan, dour yen-skilas... Daoust da se, pa vezan o soñjal en dro-spered a veze o ren er sal-debriñ-mañ, ne santan ket c'hwezh an traoù modern, tommder un ti a-zoare ne lavaran ket, un ti lec'h ma veze klasket dalc'hmat lakaat al lojidi en o jeu... e-giz mestrez an ti, Julia Gwilhoù, ur vaouez oberiant-tre anezhi. Brudet-kaer e oa an dimezell Julia e Pont-Aven, reiñ a reas bod d'ur bern arzourien ; gwelet a reer ur poltred anezhi en arem war ar blasenn a zo bet roet hec'h anv dezhi. En estajoù an adti e oa kambreier hag atalieroù al livourien... Neuze pignomp da welet salioù al live 3, lec'h m'emañ oberennoù an dastumad pad hiziv an deiz. **Ur wech eno, grit an niverenn 3.**



Julia Guillou




Teirved Estaj



Teirved Estaj- Sal 1

Lec'hioù kaer Pont-Aven



Ouzhpenn evit kaout tier-pañsion a-feson e teue an arzourien da Bont-Aven... Ur bern traoù all zo er c'hornad-mañ eus Breizh... Daoust ma ne veze ket taolennet Breizh nemeur el livadurioù betek ar bloavezhioù 1830, e oa bet kaoz abred-tre eus ar gêr vrav Pont-Aven hec'h anv, eus an draoñienn romantel hag ar pezh a oa mat enno evit an arzourien... Da skouer, e fin an XVIIIvet kantved e voe skrivet gant Jacques Cambry, e-barzh Beaj e Penn-ar-Bed, « *e trowardroioù Pont-Aven, e kêr dreist-holl, e kavfe an dreserien kant tra iskis, peadra da sevel raktresadennoù* »...

Diwezhatoc'h e teuas Thomas Trollope, ur beajour saoz, d'ober anaoudegezh gant al lec'h-mañ e 1837, ha kaoz a oa gantañ eus an natur gouez ha meurdezus, mesket enni levezon an drouized ha hini ar relijion, peadra da vroudañ awen al livourien...

Koulskoude e veze adkavet ar memes perzhioù espar en ur bern kêrioù bihan e Breizh ; e Pont-Aven avat e veze birvilh dalc'hmat gant ar porzh hag a rae al liamm etre bed ar maezioù ha hini an arvor ; se zo kaoz, marteze, e veze sachet an dud etrezek ar vro-mañ... Ouzhpenn-se ec'h erruas an hent-houarn e Kemperle e 1863, gant se e c'halle ar Barizianed dont aesoc'h betek an draoñienn : beajiñ un toullad eurioù evit en em gavout en ur bed all, gant ur sevenadur all, dilhad ha boazioù gwirion...

Ha ret eo lavaret, ma fell deoc'h komz eus an tier-pañsion adarre, chom a rae al livourien a-sav e Pont-Aven abalamour ma kavent bod eno, tra ken, e-lec'h bourc'hioù all ma ne oa ostaleri ebet...

Teirved Estaj - Sal 1

Lec'hioù brudet

Dont a reas lec'hioù zo e Pont-Aven da vout gwir arouezioù dre forzh bout taolennet gant al livourien... E-giz, lakaomp, tour iliz Sant Jozef e-kreiz ar vourc'h, a gaver e meur a oberenn. Memes tra gant Chapel Intron-Varia Tremalo a yeer betek enni dre Goad Amour, a zo ul lec'h all ma veze kavet o awen gant al livourien. Emañ ar c'hoad war ribl ar Stêr-Aven ha deuet e oa ar wenodenn a-hed ar stêr, gant gwez a bep tu dezhi, da vout danvez oberennoù evit an arzourien. Gwelet e vez war an daolenn-mañ, **Koad Amour e Pont-Aven** hec'h anv, graet e 1883 gant Marie Luplau.

Eus Danmark e oa Marie Luplau, ur wregelourez mennet anezhi hag a oa e-barzh ar strollad Skandinaviz e Pont-Aven. An daolenn-mañ eo an hini goshañ livet gant ur vaouez a c'haller gwelet e Mirdi Pont-Aven. Kustum e oa al livourien eus broioù estren da zeskiñ o micher en atalieroù e Pariz ha goude-se, evit an hañv, da glask lec'hioù ma c'hallent delc'her da labourat : unan eus al lec'hioù-se e oa Breizh.



Stag eo he zaolenn ouzh ar skol realour, graet diouzh doare Jules-Bastien Lepage : teñval a-walc'h, gant kalz aket evit a sell ouzh arlivioù an delioù hag an dargemmoù gouloù. Plijout a rae da Varie Luplau livañ diwar an natur : diwar brastresoù tapet war an tomm e peurlipe hec'h oberennoù en atelier.

E kreiz-kêr Pont-Aven ez eus un toullad lec'hioù arouezius ivez : ar blasenn, dezhi stumm un tric'horn, a zo e traoñ ar mirdi-mañ, hag evel-just ar porzh a weler amañ war div daolenn. Gant an oberenn disin-mañ, graet diouzh doare realour ar bloavezhioù 1880, e weler e oa eus an aocherezh amañ. Sinet eo an daolenn **Porzh Pont-Aven** gant Gaston Roullet, a oa ur beajer a bellvor pa oa livour ofisiel ar Morlu.

Teirved Estaj - Sal 1



An diaraogourien

Amerikaned e oa an diaraogourien, ar re o doa diskoachet Pont-Aven koulz lavaret. Henry Bacon, ul livour yaouank hag a oa o weladenniñ Breizh e 1864, a blijas al lec'h-mañ dezhañ ha buan e kontas an doare da zaou arzour amerikan all, Robert Wylie ha Charles Way, hag a zeuas betek amañ ivez.

Gwir eo ez eus peadra da vout bamet dirak al lec'h iskis-mañ gant ar reustl heñvel ouzh ar menezioù hag eñ tost ouzh ar mor, hag an draoñienn goadek kaer a zo d'e heul... Hag ar porzh-stêr a ya en-dro diouzh mareoù ar mor...

Ret eo gouzout ivez e oa Breizh diouzh ar c'hiz dre vras d'ar c'houlz-se : evit tud zo e seblante an hengounioù keltiek bout bravoc'h, a-greiz-holl, eget ar sevenadurioù gresian ha roman kozh, daoust d'ar furchadegoù bras a veze er memes mare. Klasket e veze kavout e Breizh traoù gwirion hag a seblante bout war-nes mont da goll abalamour d'an dispac'h industriel... Dedennet e oa al livourien gant Bro-Gerne koulz abalamour d'an aodoù roc'hellek ha d'ar meurvein, hag abalamour d'ar pardonioù ha d'an dilhad hengounel.

En hañv 1866 eo e voe savet da vat strollad arzourien Pont-Aven : un daouzek livour bennak, en o zouez seizh Amerikan, daou Saoz ha daou C'hall a zeuas d'en em staliañ da Bont-Aven. Divizet e voe gant Robert Wylie chom goude an hañv : ober a reas e annez amañ e-pad ar bloaz ha dont a reas da vout an den pennañ e strollad an Amerikaned. Buan-tre e redas ar brud mat war anv Pont-Aven en atalieroù Pariz ha krog e voe an taolennoù graet amañ, a ziskouezed warno arvestoù pemdez, d'ober berzh.


Er sal-mañ ez eus un emboltred gant Robert Wylie, graet war-lerc'h 1870, hag eñ tost ouzh fin e vuhez. Marvet e oa abred, pa oa en e 38 vloaz, e 1878 ; amzer en doa bet avat, en ur mod espar, da sachañ ur bern tud d'e heul war-zu Pont-Aven a voe brudet betek Philadelphia er Stadoù-Unanet. En hañv 1875 e oa etre daou-ugent ha hanter-kant arzour o chom er gêr-mañ. Komzet e veze eus ur gwir atalier livañ er-maez. Diwezhatoc'h, adalek 1888 gant Paul Gauguin, e voe klasket kemer hentoù nevez a-fet arz, met n'omp ket en em gavet eno c'hoazh.

Teirved Estaj - Sal 2

An tavarnioù hag an tier-pañsion

Gwelet livourien e-leizh oc'h en em gavout a zegase traoù d'ar vro ouzhpenn war dachenn an arz hag ar sevenadur... Un dra emsav e oa evit an dud rak ret e oa lojañ ha magañ tout an arzourien-se. Ne oant ket bet pell o kompren se hag i neuze ha feurmiñ kambreier ha grignoloù d'ober atalieroù... N'ankouait ket sellet ouzh sternioù gwer an atalieroù-se pa veoc'h o vale e Pont-Aven.

Evit al letioù, e-kreiz ar bloavezhioù 1860 e oa teir stal e kêr dija. A-raok ober o annez e Leti Julia en em stalias Robert Wylie hag e vignoned e Leti ar Veajourien, an hini brasañ, hag an hini kerañ ivez. Bout e oa ivez Leti al Leon Aour na oa ket ken ker, hag an Ti-pañsion Gloaneg, an hini bihanañ, a veze lakaet da « gwir di termajied » gant tud zo... Julia Gwilhoù a oa o labourat e Leti ar Veajourien adalek 1870 ; deuet e oa da vout kar-tost da Wylie a zo bet douaret e Pont-Aven e bez he familh just a-walc'h... Prenet e voe al leti ganti e 1878, dont a reas ar stal da vout Leti Julia diwar neuze. Coude-se, e 1881, e lakaas-hi sevel an adti-mañ.



Setu ma oa deuet an implijiadez da vout perc'hennez... ha plac'h a aferioù ! Ur spered modern ha troet da ober traoù a oa ganti evel na veze ket gwelet stank, ha hi merc'h ur miliner. Lakaat a rae rederigoù e kerz he fratikoù, dezhe da c'hallout mont betek ar mor, gwerzhañ bilhedoù evit mont e-barzh Koad Amour, roet e veze kentelioù livañ el leti gant Franck Penfold.

E-pad ho troiad e weloc'h gwerennegoù an atalieroù adkempennet diskouezet er mirdi. Amañ, e-giz en tavarnioù all, e oa goloet ar mogerioù gant oberennoù hag a veze lezet evit ober enor d'an ezhec'h. Sinet e oa lod eus an oberennoù-se gant arzourien a bouez er mareoù-se. Sellit ouzh an eoullivadur-mañ war goad deuet eus Leti Julia : **Dindan ar gwez e Pont-Aven**, livet diwar an natur e 1879 gant Jules Girardet, un arzour a orin eus Suis. E-mesk tavarnourien Pont-Aven e ranker komz ivez eus Marie-Jeanne Gloaneg a oa o telc'her an ti-pañsion kenanv ganti... Brudet-kaer e oa he brokusted hag he spered digor war bed an arzourien : en he zi e c'halled kemer dle... Eno e rene spered ar festoù ha puilh e oa ar c'hrouiñ a-fet arz. E-kreiz ar sal-mañ e tiskouezer deoc'h pajennoù he levr aour, warne skeudennoù graet gant arzourien e-giz Paul Gauguin, O'Conor ha Seguin da skouer.

An oberenn gant Van den Anker ha Quignon, a zo taolennet ganti ur senenn war an aod, a oa bet lakaet da asagn an Ti-pañsion Gloaneg, abalamour da reiñ da c'houzout e veze degemeret arzourien eno. Gwelet e veze an daolenn vras-se a-us an nor da vont tre, gwarezet gant ur baled. Warni e c'halled lenn ar meneg « *An Tiad Gloaneg ePortamaneg* » a zo aet diwar wel. Amañ e tiskouezer deomp micher al livourien en un doare kaeraet, ha hunvreet, gant labour ha dudi mesk-ha-mesk : marc'hoù-livañ pleg ha disheolieroù, hag ivez un doubier evit piknikañ hag an doare lovr m'en em zalc'h ar gouvidi. Anavezet eo Fernand Quignon evit e labour war an endrioù goulaouek ; souezhus eo neuze gwelet skeudoù bannet war meur a du amañ. Gant Otto Hagborg e welomp gwir arvestoù eus ar vuhez pemdez, evel pa vefent tapet war an tomm, e-giz **Ar Stal-vunuzerezh e Pont-Aven** e 1888.



Teirved Estaj - Sal 2



Traoù en armel-wer

Janedig Kuev (Cueff) eo a zo taolennet gant ar bennzelwenn feilhañs-mañ savet gant ar c'hizeller breizhat Louis-Henri Nicot. Barzhed ha kanerien e oa ar priedoù Kuev. Kanet o doa meur a ganaouenn skrivet gant Théodore Botrel, en doa savet La Paimpolaise hollvrudet. Graet e oa bet poltred Janedik Kuev, unan eus ar maouezed diwezhañ eus Pont-Aven hag a veze gwisket o c'hoef gante, gant al livour Émile Bernard a weloc'h e dreuz e Pont-Aven bremaik.



Teirved Estaj - Sal 4

An darempredoù gant tud Pont-Aven

Adal ar penn kentañ e oa bet degemeret mat an arzourien gant tud Pont-Aven. En em silañ a raent e-touez an dud, gwiskañ a raent pep a vered, a vareuzenn hag a grez rizennet e-giz ar vartoloded, ober a raent ton d'ar merc'hed kran o dilhad hengounel.


Ret eo lavaret e veze gouiet galleg gant tud Pont-Aven ouzhpenn ar brezhoneg. Gant se e oa aesoc'h an darempredoù hag ar c'henlabour : kontant e vezent da bozañ evit ur priz kalz izelloc'h eget e Pariz, pe evit netra zoken, e-giz ar plac'h yaouank-mañ a oa bet graet he foltred gant Henry Mosler. A-hend-all e oa ivez familhoù eus ar vro hag a c'houlenne ma vefe graet o foltred. Da skouer, **Poltred Marie-Anne Herledan** a oa bet livet war-dro 1885 gant Van den Anker diwar c'houlenn mab ar vaouez-se ; merzet e vez amañ levezon al livourien giz Holland en doare da sklêrijennañ an dremm hag an daouarn.



Hermanus- Franciscus Van den Anker, *Marie-Anne Herledan*, 1885.

Teirved Estaj - Sal 4

Livadurioù war lodennoù eus an tier-pañsion hag eus an atalieroù



Peurvuiañ, hiziv an deiz, n'anavezer al lambruskoù hag ar pannelloù livet en atalieroù hag en tavarnioù eus Pont-Aven nemet dre an testennoù lec'h m'int deskrivet. Gant an oberenn disin e teirzaolenn a ya d'ober dor un atalier eo taolennet, krec'h-ha-traoñ, **Ar Goumona, Ar Stêr-Aven ha Porzh Pont-Aven** gwelet diwar ar c'hae ; soñjal a reer e oa bet livet war-dro 1890-1895.



Levezonet eo an oberenn-se gant ar skol drivliadelour, gant an doare d'ober gant pikoù gouloù bihan. Adkavet e oa bet en un atalier hag a veze feurmet d'an arzourien, ouzh tor Kerampercheg.

E-kichen emañ panell Arthur Dow, un arzour amerikan levezonet gant gizioù Japan, deuet da vout mirour e mirdi an Arzoù-kaer e Boston, a weler warni dremm ur plac'h damdreset, ur c'halvar hag un dra skrivet gant an dorn.

En Ti-pañsion Gloaneg eo e plije da Baul Gauguin lojañ. Gauguin... Poent eo deomp neuze tostaat ouzh an den en doa skrivet, adalek 1886, ur bajenn nevez eus ar pep pouezusañ en istor an arz e Pont-Aven... Deomp betek e gabined, war-lerc'h ar frizenn gronologel...


Teirved Estaj - Sal 5

Buhez Gauguin betek Pont-Aven

Peseurt hentoù a oa bet kemeret gant Paul Gauguin a-raok en em gavout e Pont-Aven ?

Ganet e oa e Pariz e 1848. Mab-bihan e oa da Flora Tristan. Hag eñ yaouank c'hoazh ez eas da vartolod, a-raok mont da gourater en Eslemmdi. Ober a reas anaoudegezh gant an arz livañ gant e ward, Gustave Arosa, a oa dastumer oberennoù ha mignon d'al livourien. D'ar c'houlz-se eus e vuhez e c'houneze trawalc'h evit kregiñ da sevel e zastumad dezhañ, gant oberennoù trivliadelour dreist-holl. En em lakaat a reas da livañ gant youl dindan gwarez e vestr, Camille Pissaro.

Deskiñ a rae e-unan. Er penn kentañ e live e-pad e amzer vak ha daremprediñ a rae an akademiezh prevez Colarossi e Pariz. Diskouez a reas e oberennoù evit ar wech kentañ e Saloñs 1876 hag e fin ar bloavezh-se e voe graet e soñj gantañ gouestlañ e amzer penn-da-benn d'an arz. Met e daolennoù, a oa stag ouzh ar stil trivliadelour bepred, ne vezent ket gwerzhet nemeur ha gant se ec'h adkrogas da labourat e bed ar bankoù. War-lerc'h ar freuz yalc'h e 1882 e kollas e labour ha ken berr e oa an argant gantañ ken ez eas da speger skritelloù diouzh an noz, e gar an Norzh e Pariz...



Moarvat eo gant Fernand Quignon ha Claude-Emile Schuffenecker en doa klevet komz eus ar gumuniezh arzourien e Pont-Aven hag eus an Ti-pañsion Gloaneg ma c'halle an dud kemer dle da c'hortoz e vefe brasoc'h an argant gante. Gwir eo e oa aet kuit eus Pariz un tamm mat abalamour ma oa diaes an traoù dezhañ... met santout a rae ivez e oa krog e awen da vont da hesk. E 1886, hag eñ 38 vloaz, e teuas da glask bod da Pont-Aven evit ar wech kentañ.

Koshoc'h e oa eget ar re all ha buan e teuas da vout unan eus an dud pouezusañ... Treiñ a reas kein d'an Drivliadelouriezh ha gant e deoriennou dezhañ e-unan e tegasas cheñchamantoù bras er strollad arzourien a oa merket gant ar stil akademiek betek-henn.

Diskouezet ez eus amañ oberennoù gant e vignoned tostañ : Schuffenecker, Monfreid, Maufra... A-wechoù e veze graet goap anezhañ, alies avat e veze bamet an dud dirazañ ha tamm-ha-tamm ez eas pelloc'h-pell war an hent dibabet gantañ, koulz war dachenn al livañ, an engravañ, ar c'hizellañ hag ar prierezh.




E-kerzh e eil chomadenn e Pont-Aven e 1888 e reas anaoudegezh gant Émile Bernard, ar pezh a voe pouezus-tre hag e-giz-se e krogas gant enklaskoù hag e lakaas digeriñ un hent nevez evit al livañ modern : krouet e voe un doare arz nevez hag a vo graet sintetegezh anezhañ... E Pont-Aven eo e kavas Paul Gauguin peadra da adneveziñ e arz ha da cheñch e savboent evel krouer. Skrivet en doa da Schuffenecker : *"Tost ouzh ar mor emañ o vevañ eno e-giz ur peizant ha graet e vez gouez ac'hanon... Karout a ran Breizh. Eno e kavan ar pezh a zo gouez, kentidik. Pa vez ma botoù-koad o tregerniñ war al leur greunit e klevan ar son bout, mouk ha kreñv a glaskan livañ"*.

Da-geñver an diskouezadeg hollvedel e 1889 e Pariz e tiskouezas ur rummad zingengravadurioù en ostaleri Volpini, dindan gwarez ar « Strollad trivladelour ha sintetegour ». Skouerennoù anezhe zo diskouezet amañ. Distreiñ a reas da Bont-Aven etre 1889 ha 1890, hag e 1894, goude-se ez eas kuit eus Frañs da vat evit mont da Okeania, lec'h ma oa bet meur a wech dija.

Teirved Estaj - Sal 7

Ar gentel e Koad Amour



Roet e oa bet « *Ar gentel e Koad Amour* », evel ma vez lavaret gant istorourien an arz, gant Paul Gauguin da Baul Sérusier. P'en em gavas an daou zen an eil gant egile evit ar wech kentañ e tiskouezas Sérusier ul livadenn da Gauguin, ul livadenn en doa klasket warni rentañ arlivioù rouz ar raden en diskar-amzer. Gauguin, a zo o paouez kompren nerzh al liv digemmesk, a c'houlenn gantañ neuze perak n'eo ket bet o livañ anezhe e vermilion, tra ken... ha da gas anezhañ gantañ war ribl ar Stêr-Aven evit displegañ e deoriennoù dezhañ diwar ar sujed war-eeun. D'ar 6 a viz Here 1888, war ar wenodenn a dremen a-hed ar stêr e Koad Amour, e voe savet un daolenn gant Sérusier renet gant Gauguin a c'houlenne gantañ livañ ar pezh a wele, neket e-giz ma oa an traoù rik met diouzh an doare ma sante anezho.

E-giz-se e teuas ar gwez da vout melen-kann, ar skeudoù glas-mor teñval, an delioù ruz... Se eo natur ar sintetegezh, livañ gant livioù digemmesk lakaet a-blat, ar pezh a ra d'an eeunaat daouventek bout eeunoc'h c'hoazh. Er bloavezh-se ivez en doa skrivet Gauguin ul lizher da Schuffenecker : « *Un ali fur, na gopiit ket re diwar an natur, difetis eo an arz, hunvreit dirak an natur evit tennañ an difetisted-se diwarni, soñjit er c'hrouiñ kentoc'h eget en disoc'h.* »

Mont a reas Sérusier da Bariz war e giz e daolenn vihan war ur banell goad gantañ. Evit lod eus e gendiskibled en Akademiezh Julian lec'h ma oa o studiañ e oa an daolenn-se e-giz un diskuliadur. Bamet e oa Maurice Denis, Pierre Bonnard, Henri Gabriel Ibels ha Paul Ranson, a savas ar strollad Nabi asambles gantañ, dirak ar maeziad-se adstummet en un doare sintetek. Coude-se e oa bet lakaet an anv An Talisman d'an daolenn-se. Hiziv an deiz emañ e-touez an oberennoù pennañ a zo e Mirdi Orsay e Pariz. Gant ur benveg etreoberiat e c'haller anaout gwelloc'h an oberenn arouezius-tre-se. Diwar he livioù eo bet lakaet re ar moulladurioù-moger er mirdi-mañ. Tostait ivez ouzh ar bonnoù-son abalamour da selaou tammoù eus an eskemmoù lizheroù etre Gauguin hag arzourien all.



Paul Sérusier, *Le Talisman*, 1888.
(Musée d'Orsay)


Teirved Estaj - Sal 7

Hag ur skol a oa e Pont-Aven e gwirionez ?

Adalek 1888 e oa krog an traoù da cheñch en-dro da Gauguin. En ul lizher kaset d'e wreg e 1886, just a-walc'h, e oa o fougeal an doare ma oa an ton hag ar son gantañ e Pont-Aven, ne oa « *arzour ebet da zalc'her penn ouzh ma c'hredennoù start...* », a skrive. Mont a rae enep tud an akademiegezh, tostaat a rae ouzh al livourien a oa o klask hentoù nevez ha dont a reas da vout mentor un toullad re yaouank e-giz Paul Sérusier pe Émile Bernard...

Daoust da se ne oa ket tre e-giz ur mestr hag e skolidi tro-dro dezhañ : bout e oa kentoc'h ur strollad arzourien bodet en-dro da Gauguin, hag a vroude awen an eil egile, a lakae soñjoù ha teoriennoù boutin distag diouzh ar gelennadurezh ofisiel hag akademiek.

A-benn ar fin eo war-lerc'h e voe graet Skol Pont-Aven eus ar strollad-se, un ugent livour bennak ennañ, a voe levezonet da vat gant Gauguin er vourc'h-mañ e Breizh etre 1888 ha 1898... En o zouez e oa Charles Filiger, Meijer de Haan, Claude-Émile Schuffenecker, Armand Seguin, Wladyslaw Slewinski, Maxime Maufra, Jens Ferdinand Willumsen pe c'hoazh Jan Verkade, a oa bet an darn vrasañ anezhe o chom e Pont-Aven e-pad ur pennad amzer.




Diwar o c'henlabour e oa deuet un doare arz war wel un tamm met al livourien-se a zeue eus bedoù disheñvel-tre an eil re diouzh ar re all, eus a bep seurt broioù, an holl n'o doa ket dalc'het goude gant ar sintetegezh lañset gant Gauguin : lod anezhe a zalc'has gant an drivliadelouriezh pa zistroas lod all war-zu ar stil klasel.

Gante tout avat eo e Pont-Aven e oa bet desket « *... an droed da grediñ ober pep tra* », evel ma lavare Gauguin, ha digoret meur a hent pouezus evit al livouriezh a vremañ...

Teirved Estaj - Sal 8

Paul Sérusier



Komzomp hiroc'h diwar-benn Paul Sérusier hor boa bet tro da welet dija da-geñver an **Talisman**. Savet e oa bet an daolenn **Ar Porc'helligoù** gantañ e 1889 diouzh doare Skol Pont-Aven. Livet eo ar sujedoù a-blat, eeun eo an tresoù ha savet eo an daolenn diwar daou dachad warne livioù splann an eil re en enep d'ar re all : livioù tomm ha livioù yen. Amañ e klasker lakaat santout traoù kentoc'h eget diskouez traoù. Arabat ankouaat an doare digustum m'eo kouchet an daolenn : troc'het eo bet krec'h korf ar vaouez. Kavet e vez an doare frank-se da aozañ an taolennoù, ar pezh a oa nevez d'ar mare-se, e-barzh oberennoù Gauguin... **Diabarzh un ti e Pont-Aven** zo un daolenn graet gant Sérusier e 1888 : an Ti-pañsion Gloaneg e c'hallfe bout, n'ouzer ket re, ar pezh a zo sur eo e oa en em gavet Sérusier e Pont-Aven e 1888 ha livet e oa bet an oberenn-se gantañ en ur stil akademiek a-walc'h a-raok ober anaoudegezh gant Gauguin.

En un trede oberenn gant Sérusier e weler emdroadur ul livour eus Pont-Aven pa ne oa ket mui ken tost al liammoù etre an dud er strollad. War-lerc'h bout gwelet an **Talisman** ha kemeret perzh e luskad an Nabis e cheñchas e vod da liveañ er bloavezhioù 1890 : ne rae ket gant livioù digemmesk ken met meskañ a rae anezho gant liv gris. Ar pezh a weler gant **Bretonez vihan azezet** livet e 1895. War a seblant e vefe Marie Franciscaille a c'haller gwelet raktresadenn he foltred amañ ivez. D'ar c'houlz-se e oa Sérusier o vevañ e Kastell-Nevez-ar-Faou ha kavout a rae danvez e oberennoù e-touez an dud eno. E 1921 e lakaas embann un ABC de la peinture savet diwar e daolioù-esae, lec'h ma tisplege un deorienn war ar furmoù hag ar c'hrommennoù simpl hag un doare da gavout livioù disked.

Teirved Estaj - Sal 8

Émile Bernard

Ne c'haller ket komz eus Émile Bernard anez ober anv eus ar gejadenn a voe ken pouezus evit Paul Gauguin hag evit Pont-Aven. E 1886 e krogas Émile, hag eñ 18 vloaz hepken, d'ober tro Breizh war droad. Tremen a reas e Konk-Kerne ma reas anaoudegezh gant Claude-Émile Schuffenecker, a vroudas anezhañ da vont da Bont-Aven davet Gauguin.

Diseblant a-walc'h e voe an degemer, Gauguin ne reas ket kalz a van ouzh Bernard, marteze abalamour na oa ket hennezh un arzour gwall anavezet, ouzhpenn-se e oa tost ouzh an drivliadelourien c'hoazh, pa oa Gauguin o treiñ kein dezhe tamm-ha-tamm... C'hwitet e voe an emgav kentañ neuze met e-giz-se en doa gallet Bernard ober anaoudegezh gant Pont-Aven a oa krog da dapout lañs a-fet arz ha kement-se a vountas anezhañ da glask e zoare dezhañ da liveañ ha da bellaat diouzh levezon an drivliadelouriezh. Ur wech distro da Bariz e tostaas ouzh Van Gogh hag ouzh Louis Anquetin dreist-holl.

Asambles gant hennezh en doa diazezet e 1887 un doare liveañ hag a vez graet « *kloazonouriezh* » anezhañ : furmoù simpl lakaet a-blat kichen-ha-kichen ha kelc'hiet gant tresoù du e-giz gwerennoù-livet, livadurioù ha ne glasker ket mui gante diskouez donder an traoù. Pouezus eo an tresoù du-se rak kavet e vezont ivez er sintetegerzh, daoust na weler ket se splann en **Talisman**.



Goude bout aet gant an hent nevez-se e c'hallas Émile Bernard mont da gejañ gant Gauguin pa zistroas da Pont-Aven e 1888... Diwar o enklaskoù teorikel boutin dezhe o-daou e savas an daolenn **Bretonezed er bradenn c'hlas** a blijas kalz da Gauguin. Hennezh, eus e du, a reas **Gweledigezh ar sarmon**. Hag en diskar-amzer e tegouezhas ar gentel e Koad Amour... Er bloavezh-se e voe ganet ar sintetegerzh, hep mar ebet.

Gant an daolenn An ed-du, a welomp ur raktresadenn anezhi amañ beuzet el liv ruz, e kinnigas Émile Bernard ur seurt kendon da **Bretonezed er bradenn c'hlas** : livioù digemmesk bepred, deuet diwar kounaat ar santadoù liammet ouzh un degouezh kentoc'h eget diwar an degouezh gwirion. Kemend-all a vez gwelet mat ivez e-barzh **Maezioù Pont-Aven gant gwez-pupli**, un dourlivadur graet e 1888 ivez. Gant **Ar C'houronkerezed** ne ya ket ken pell gant e zibaboù a-fet arz : a-dra-sur e oa bet gwelet taolenn Cézanne, dezhi ar memes titl, gant Émile pa reas war-dro an tem-se rak splann eo e oa bet levezonet ganti.

Teirved Estaj - Sal 8

Priajoù ha Kelc'h kromatek

Peogwir emamp o komz eus al liv e kinnigan deoc'h sellet ouzh ur c'helc'h kromatek... Graet e oa bet hemañ gant Paul Sérusier ha n'eo ket diaes soñjal eo warnañ e oa bet diazezet e enklaskoù evit l'ABC de la peinture, e 1921... pe e enklaskoù arzel tra ken ! Gwelet a reer en deus lakaet ar gris e-kreiz ar c'helc'h savet gantañ d'ar mare ma oa en em staliet e Kastell-Nevez-ar-Faou : da neuze en doa displeget e veze degaset santadoù a gempouez hag a beoc'h el livadurioù diwar ober gant arlivioù gris a bep seurt. Kavout a rae dezhañ ivez e oa arabat meskañ al livioù tomm hag al livioù yen, soñjomp er **Porc'helligoù** hor boa gwelet a-raok...

Rak hervezañ e vez dalc'hmat koc'hennoù er pigmantoù : al livioù a voug an eil egile pa vezont mesket, ne chom neuze nemet tres al loustoni.

En armel-wer-mañ e welomp ivez podoù-espenn ha picheroù graet gant ar priour Ernest Chaplet, a gejas gant Gauguin ivez : labouret o doa asambles evit sevel meur a bezh priaj. Savet e oa bet ar re-mañ a-raok ma rafent anaoudegezh an eil gant egile met merzout a reer enne an tresoù bleunioù mod Japan... Sed aze, mod Japan !



Unan all eus perzhioù ar sintetegezh hor bo da gomz diwar e benn c'hoazh. E fin an XIXvet kantved e oa an arz japanat diouzh ar c'hiz en Europa ha gant an arz-se diazezet war tresoù diginkl ha livioù a-blat e vez degaset da soñj deomp eus un toullad teoriennnoù sintetegezh...


Met a-raok mont war-zu bro ar sav-heol e ranker ober anv eus ur perzh all hag a gaved gant diazezerien Skol Pont-Aven : ar c'hask speredel.

Teirved Estaj - Sal 9

Rann speredel

Lavaret e oa bet gant Gauguin : « ... *soñjit er c'hrouiñ kentoc'h eget en disoc'h. An doare nemetañ eo da sevel etrezek Doue en ur ober e-giz hor Mestr doueel, krouiñ.* » Moarvat e oa gant ar soñj livañ abalamour da dostaat ouzh Doue en ur mod... Kavet e vez stank tem ar relijion gant livourien Pont-Aven, evel ma weler gant an dibab taolennoù ha maendresadennoù amañ. Gauguin e-unan en deus en em daolennet e-giz Jezuz Krist war lod eus e oberennoù...

Ha just a-walc'h, Maurice Denis, a oa ezel eus an Trede urzh dominikan, en doa prenet e 1903 an **Emboltred gant ar C'hrist** melen livet gant Gauguin... Gant Denis avat e oa stag e vod da welet an traoù sakr muioc'h ouzh ar pemdez e-giz Pirc'hirined Emmaüs, ur vaendresadenn e liv graet e 1895. Gant Émile Bernard, er c'hontrol, e oa ar skeudennoù relijiel klasel un diazez, gwelet a reer gantañ oberennoù gant ar Werc'hez he Mabig Jezuz, ginivelezhioù... Evit Paul Sérusier, mont a rae war dachenn ar C'hevren gant enklaskoù en-dro d'an « *niver aour* » ha d'ar formulennoù matematik a ouie gante peseurt kenfeurioù a ranke implijout en oberennoù relijiel. Merzout a reer mat un doare diginkl simetrek gant ar **Werc'hez he Mabig Jezuz** a zo diskouezet amañ...



It would seem then fair to speak of a mystic disposition shared by the Pont-Aven painters; a disposition which forms part of a wider wave of mysticism which swept the world in the late 19th century. It's understandable how Brittany was then a powerful centre of attraction with its wayside crosses, chapels and megalithic monuments which point to more ancient beliefs

Teirved Estaj - Sal 9



Kevrinegezh, arouezouriezh pe sinkretegezh ?


Meur a dra a seblant bout mesk-ha-mesk e relijiusted Breizh, met da'm soñj e c'haller lavaret kemend-all diwar-benn speredelezh al livourien-se... Diazezet e oa ar gevrinegezh a zeue war wel en o oberennoù war ur savboent sinkretek, da lavaret eo e veskent levezonoù a bep seurt ouzhpenn ar re a oa diwar ar gristeniezh. Arouezour e oa o savboent ivez rak ne oa ket graet o oberennoù evit selloù an den, evit e spered da gentañ-penn ne lavaran ket.

Deuet e oa an arouezouriezh war wel el lennegezh, gant Charles Baudelaire dreist-holl, ha mont a reas d'ober ur sichenn hag a voe savet warni ar gloazonouriezh hag ar sintetegezh goude-se. E manifesto an arouezouriezh, e 1886, e skrive ar buruteller Jean Moréas e oa perzh pennañ al luskad-se reiñ ur stumm merzus d'ar soñjoù, da lavaret eo : lakaat gwelet ar pezh na vez ket gwelet. Gallout a reer lavaret e oa ar sintetegezh an doare ma oa deuet an arouezouriezh war wel e Pont-Aven. Met trawalc'h a c'herioù hag a echu gant « egezh » pe « ouriezh » ha poent eo moarvat ober anaoudegezh da vat gant ar perzhioù pennañ a ya d'ober Skol Pont-Aven, pa n'hor beus graet nemet gwelet tammoù anezhe betek-henn...

Er sal da-heul e vo gwelet ur film hag a gont an diviz etre Émile Bernard ha Paul Gauguin hag an doare ma oa ganet ar sintetegezh dre an oberennoù diazez kentañ.

Teirved Estaj - Sal 11

Teknikoù ha teoriennoù Skol Pont-Aven



Evel m'hor beus gwelet, p'en em gavas Paul Gauguin e Pont-Aven e oa o treiñ kein d'an drivliadouriezh hag a seblante dezhañ bout re stag ouzh an hengoun c'hoazh, ha pa oa ur stil modern da livañ d'ar c'houlz-se. Livañ ar bed gwirion ne oa ket mui an hent a felle d'an arzour kemer, ret e oa d'an arz bout difetis... E 1888 e voe e-giz un dispac'h pa grouas, asambles gant Émile Bernard, ar stil a vez graet sintetegerzh anezhañ. Daoust da se e talc'has atav da vamiñ ouzh oberennoù Pissaro, Degas, Cézanne... Stag e oa ar sintetegerzh ouzh al luskad aouezouriezh ; n'eus ket da vout souezhet e lavare ar sintetegerhien e oa dav livañ dindan eñvor abalamour da bellaat ar muiañ ar gwellañ diouzh al livañ diwar an natur. En em leuskel a raed da vout intret gant ul lec'h ha goude-se e veze adstummet en atalier, pell diouzh al lec'h e-unan : diwar se e veze lakaet ar soñj hag ar santad war wel, muioc'h eget diskouez ar wirionez.

Pa ranker termeniñ ar sintetegerzh a-fet teknikoù e c'haller lavaret ez eo he fal pennañ eeunat : eeunaat ar furmoù, an doare d'ober gant al livioù, digemmesk, a-blat, enep krenn an drivliadouriezh hag he zouchennoù gouloù bihan.

N'en deus ket ezhomm al liv seurt-se da vout heñvel ouzh ar wirionez : graet eo evit ezteuler ur sell subjektivel ha fromel. Skrivet en doa Maurice Denis : « Delc'her soñj ez eo an taolennoù, da gentañ-penn, gorreoù plaen goloet gant livioù strollet hervez un urzh bennak, a-raok bout ur marc'h brezel, ur plac'h en noazh pe un darvoud bennak. » Hag ouzhpenn-se emañ an tresoù, amprestet digant ar gloazonouriezh lañset gant Anquetin ha Bernard, graet evit lakaat ar gorreadoù liv war wel. Kouchet e veze an taolennoù en ur mod dic'hortoz, tudennoù pe munudoù zo a c'halle bout troc'het ; an disparti etre ar raktalenn hag an drektalenn a c'halle bout merket splann, e-giz estajoù. Diwar se ez eus deuet ur berspektivenn nevez, pe taolennoù hep perspektivenn zoken, tresadennoù plat daouventek. Graet ez eus bet e-giz-se ur « sintezenn » diwar furmoù naturel eeunaet ha santadoù an arzourien e-keñver an temoù choazet gante. Ne weler dre vras nemet un toullad ec'honnennoù, un toullad livioù.

Teirved Estaj - Sal 11



Oberennoù arouezius a-berzh Skol Pont-Aven

Amañ e weler oberennoù gant arzourien merket kalz gant ar stil lañset gant Paul Gauguin hag Émile Bernard. En daolenn **An Ouf**, savet gant Maxime Maufra, eo bet tolpet an efedoù ha lamet ar munudoù abalamour d'ezteuler santadurioù kreñv diouzh spered ar sintetegezh.



Livet eo bet ar mor gant toaz tev, lezet eo bet liv gwenn al lien gwerc'h evit an tornaodoù. E-barzh taolenn Charles Filiger, **Lec'h roc'hellek, ar Pouldu** eo splann eo bet eeunaet an traoù : emañ an talennoù an eil war eben a-serzh, lusket gant al livioù. Savet eo bet liorzha ar mirdi-mañ diwar skouer an daolenn-se. War **Maeziad ar wezenn c'hlas** gant Meijer de Haan, ec'h adkaver en ur mod splann al liv lakaet a-blat, hep perspektivenn, ar skeudennoù bevennet gant tresoù glas hag eeunaet ar muiañ ma c'haller.

Gant Maxime Maufra, Meijer de Haan, Wladyslaw Slewinski, Charles Filiger hag Émile Jourdan e tiskouezer deoc'h amañ pinvidigezh ha liesseurted strollad Pont-Aven.

Teirved Estaj - Sal 11

Ar strollad oc'h en em strewiñ

Pa'z eas Gauguin kuit war-zu Tahiti evit ar wech diwezhañ, d'an 28 a viz Even 1895, e oa an darn vrasañ eus al livourien a oa bet tost outañ en ur maread etre. En em strewiñ a reas un toullad anezhe e Breizh, evit mont gant ar strolladoù arzourien e Konk-Kerne, Douarnenez, Kameled ha Kankaven. Aet e oa Émile Bernard betek Kaero (Le Caire) dija ma adkrogas gant ur stil klasel a-walc'h diwar skouer mistri an Azginivelezh. Ne baoueze ket da embann e oa-eñ tad ar sintetegezh hag abalamour da se e oa broc'het ouzh Gauguin abaoe 1891. Hennezh, forzh penaos, a baouezas da zaremprediñ kement den en doa anavezet e Breizh, pe dost : ne oa bet Pont-Aven nemet ur bazenn evit tizhout ar pezh a felle dezhañ ober ha klask a rae un awen nevez en inizi ar Meurvor Habask evit bout disheñvel diouzh ar re all, daoust ma veze kavet roudoù eus e labourioù e Breizh e-barzh e daolennoù graet du-hont. E-touez ar pemzek bennak a livourien a c'haller lakaat e « Skol Pont-Aven » n'eus nemet pevar hag o doa bevet eno ur wech aet Gauguin kuit : Émile Jourdan, Charles Filliger, Roderic O'Connor ha Wladyslaw Slewinski.

Delc'her a reas al livourien maeziadoù eus ar strollad, e-giz Moret ha Maufra, da labourat tro-dro da Bont-Aven ha da Vreizh met furc'h e oa o stil, tostoc'h ouzh an drivliadouriezh. Ret eo gouzout e oant dindan ar palierour Durand Ruel a rae war-dro gwerzhañ o oberennoù ha sklaer e oa ar pezh a c'houlenne digante : « Grit diouzh ma vo peurlipet an taolennoù-se ar muiañ ar gwellañ, gant an natur dindan ho taoulagad rak diaes eo, en un atelier, adkavout an arlivioù a bep seurt ha soutil-tre a weler er maeziadoù. » Pell-pell e oamp aze diouzh al labour dre eñvor a veze goulennet gant Gauguin.

Distreiñ a reas un toullad arzourien eus strollad Pont-Aven betek o bro orin. Cuno Amiet a oa distro da Suis e 1893 ; ne voe ket komprenet mat e daolennoù graet e Breizh pa voent diskouezet e Basel (Bâle) e 1894, komz a rae an arzvarnourien eus « lammoù gavr kromatek digredus, (...) saouzanoù diroll un daltoneg ». Fellout a re dezhañ avat, evel ma skrive e-unan, delc'her gant « hent madoberus ha salvus Pont-Aven » ha diskouez a rae e oberennoù bepred ; levezonet e voe gantañ arzourien yaouank diaraogour eus Alamagn. E Danmark e voe brudet stil Pont-Aven gant Mogens Ballin ha Jens Ferdinand Willumsen.





Teirved Estaj - Sal 12

Bro-Japan hag Europa

En XIXvet kantved e oa ar japanouriezh diouzh ar c'hiz en Europa a-bezh, betek mont da sodiñ memes. Kregiñ a reas kement-se e 1853, pa'z eas tre morlu ar Stadoù-Unanet e bae Edo, a oa difennet ouzh an estrenien a vont ennañ betek-henn. Rediet e voe Bro-Japan gant an Amerikaned da asantiñ d'un emglev evit ober kenwerzh gante ; goude-se e voe graet kemend-all gant broioù pennañ Europa. Diwar neuze e voe degaset ur bern pezhioù arz pe artizanerezh eus Japan betek ar Stadoù-Unanet hag Europa, ha lakaet e voent war wel en diskouezadegoù hollvedel, e-giz e Pariz e 1867.

Eno e voe diskouezet ar stampoù ukiyo-e, ar pezh a dalvez : *«skeudennoù eus ar bed war neuñv»*. Savet e oant bet gant ul luskad arzel hag a badas eus 1603 betek 1868 ha lakaet e oant da draoù vil gant Japaniz abalamour d'o zemoù poblek ; plijout a reas ar stampoù-se da Gornôgiz ken-ha-ken avat. Livourien hag engraverien a zeuas neuze d'anaout doareoù digustum dezhe a-fet livioù, tresañ, pajennaouiñ, perspektivennoù ha ment, hag a zegasas kemmoù bras e-keñver ar mod da sevel oberennoù. Delc'her a reas ar stroñsadenenn-se da verkañ an holl skolioù arz gant, koulz an Drivliadouriezh hag an Arz Nevez, ha betek an Arz-kinklañ zoken.




Savet e oa bet ar ger « japanouriezh » e 1872 gant an arzvarnour Philippe Burty hag, e penn kentañ ar bloavezhioù 1880, e oa Pariz gwir greiz al luskad japanouriezh. En em staliet e oa an daou varc'hadour Tadamas Hayashi ha Siegfried Bing e Pariz war-lerc'h an diskouezadeg hollvedel e 1878, ha pouezus e voent evit skignañ ar stampoù ukiyo-e engravet war goad.

En ur mod e oa ar japanouriezh ur seurt kentidigezh a-raok ar c'houlz, pa oa levezonet al luskad diwezhañ-se, e deroù an XXvet kantved, gant arzoù Afrika Du hag Okeania : merzout a reer amañ e oa un den e-giz Gauguin oc'h ober al liamm etre an daou luskad, dres...

Evit ar remziad trivliadour e oa tost an arz japanat ouzh an natur, en ur mod animegour koulz lavaret, ha gant an doare pizh ma veze taolennet ennañ kened an disterañ tra eus ar vuhez pemdez, e tiskoueze e c'halle an arz hag ar gevredigezh bout a-unan.

Teirved Estaj - Sal 13

Pont-Aven hag ar japanouriezh



Deuet e oa al luskadoù arzel diaraogour eus broioù ar C'hornôg, en XIXvet kantved, da vout un endro a-feson d'an arz japanat da vleuñviñ. Ouzhpenn bout levezonet gant an arz-se ec'h adkavent ennañ an hent a oa bet dibabet gante ha reiñ a reas lañs d'o enklaskoù a oa boulc'het gante dija. Sot e oa Monet, Moreau, Degas ha, diwezhatoc'h, Van Gogh ha Toulouse-Lautrec gant Utamaro, Hokusai ha Hiroshige. Sevel a rejont oberennoù levezonet gant teknikoù ar stampoù ukiyo-e.

E Pont-Aven eo splann al liamm gant ar sintetegezh : ar yezh neuziañ nevez deuet war wel e Breizh zo da vout lakaet keñver-ha-keñver gant ar stampoù-se. En e notennoù embannet e 1903 e skrive Émile Bernard e oa Bro-Japan ar vammenn bennañ d'ar sintetegezh : « Diwar studiañ ar c'hreponoù japanat omp lakaet da eeunaat hag e krouomp ar gloazonouriezh. » Setu ma plije an oberennoù hep perspektivenn da gumuniezh vihan Pont-Aven, oberennoù hag a oa berzet an donder enne, meur a dalenn eeunaet kichen-ha-kichen da rannañ an ec'honder enne ; adkavout a raent ar pezh e oant o klask gant an doare digustum ha digreizet da gouchañ ken e veze troc'het ar furmoù, an doare da eeunaat, al linennoù kromm dilikat puilh, an tresoù bleunioù ha plant stilekaet, hag ar fed ne veze ket klasket diskouez an ec'honder nag ar skeudoù, en o flas e veze lakaet gorreadoù livioù splann a-blat.

Santet e vez se mat en André Jolly, da skouer, a zaremprede Pont-Aven ingal adalek 1903. Lakaet e oa bet d'anaout teorioennoù Gauguin gant Henry Moret. En daolenn **Ar Vezhinaerien**, un eoullivadur savet e 1910, a ziskouezer amañ lod eus ar seizh raktresadenn anezhañ, eo dispar ar mod m'eo stilekaet an traoù ha taolennet ar mor, ar pezh a zegas da soñj eus an eon war stampoù Hokusai.



André Jolly, Les Goémoniers, 1910.

Teirved Estaj - Sal 13



Orin an Nabied

E fin ar bloavezh 1888 e voe lañset luskad an Nabied gant un toullad livourien eus an Akademiezh Julian bodet en-dro da Paul Sérusier – a oa o tistreiñ eus Pont-Aven. Hervez kont eo Auguste Cazalis en defe kinniget an anv-se da Maurice Denis. Savet e oa bet diwar gallekaat ar ger "nebiim" a dalvez "profed" en hebraeg hag en arabeg.

Hervez Maurice Denis e oa bet choazet an anv-se gant an Nabied abalamour ma « tlee o spered bout o virvilhañ dre natur ». En em vodañ a raent en atalier Paul Ranson. Fellout a rae dezhe treiñ kein d'ar sell naturelour a oa gant an Drivliadouriezh hag en em lakaat a raent da Arouezourien da vat. Embann a raent e oant stag ouzh sintetegezh Paul Gauguin hag evite e oa an **Talisman** kement hag arouez ur genedouriezh nevez. Er strollad-se e oa Paul Sérusier, Maurice Denis, Pierre Bonnard, Georges Lacombe ha livourien eus broioù all, en o zouez an arzour suis Félix Vallotton. Diwar ar c'havadennoù arzel e voe diazezet teoriennoù gant Sérusier ha Denis intellektualed ar strollad, hag embannet manifestoioù ; levezonet e oant gant ar gristeniezh pe an deozofiezh, a zo un doktrin diazezet war ar fed e vefe furnez Doue e pep lec'h, e mab-den dreist-holl, ha gant se e savent oberennoù ezoterek ha kevrinek. Gant o labour e voe roet lañs en-dro d'an arz sakr e fin an XIXvet kantved.

Tud all eus ar strollad-se – e-giz Bonnard ha Vuillard – a savas taolennoù tostoc'h ouzh re an Drivliadourien hag ar Faovourien.

Dalc'het e oa bet trizek diskouezadeg gant an Nabied etre 1891 ha 1896. Evit a sell ouzh ar stil e oant tost ouzh Skol Pont-Aven, ha darn anezhe o deze digarez da zont amañ ur wech an amzer. Setu ma oant evit oberennoù daouventek, kuit a glask taolenniñ an ec'honder pe ar perspetivennoù a yae enep ar from hag ar santad kentañ.

Sot e oant gant al livioù flamm lakaet a-blat, al linennoù kromm, ar furmoù simpl. Livañ a ranke bout ur mod da intent an natur diwar dibaboù ha sintezenn, ha reiñ da santout atav emañ an hunvre hag ar speredelezh e kement degouezh a vez er vuhez. Bamet e oa an holl Nabied dirak Gauguin.

Teirved Estaj - Sal 14

Oberennoù arouezius sal an Nabied

Daoust ma n'en doa ket bet tro Cuno Amiet, a zo diskouezet daou zour-kreñv gantañ amañ, da zaremprediñ ar strollad Nabi pa oa war e studi en Akademiezh Julian, e teuas da chom trizek miz en Ti-pañsion Gloaneg e 1890, ha komz a reas eus se youl ennañ : « En em gavout a reas livourien : Chamaillard (...), Émile Bernard (...), goude-se Seguin, Moret ha Sérusier. Lañs a oa gant ar gaoz hag an divizoù teorikel (...) Graet em boa anaoudegezh gant O'Connor, un Iwerzhonad fin, leun a startijenn gantañ, hag a live tonioù sklaer, hep troc'h. Armand Seguin, hegarat ha lemm e spered, a glaske ober a bep seurt. Émile Bernard en doa kaset e oberenn da benn hag a gomze war an ton bras eus Gauguin, Van Gogh ha Cézanne. Eno e oa oberennoù maendreserezh Daumier, en o fezh (...) *Birvilh a oa er bed-se, lec'h ma veze renet ur stourm dibaouez ; met dreist-holl, hag ar pep pouezusañ e oa, an holl a oa o livañ gant kalz a youl.* »

Livet e oa bet **Mamm he bugel er Pouldu**, efed serr-noz gant Maurice Denis e 1899 eus Leti ar Pouldu-Clément Portier. Labourat a rae diwar furmoù eeunaet met ne lakae ket al livioù a-blat penn-da-benn ha ne rae ket gant livioù digemmesk e-giz ma veze goulennet gant Skol Pont-Aven ; memes tra eo pladet ar berspektivenn ha diskouezet eo gant ar mor hag an aod a weler war meur a zerez dre ar prenest.

Ar wech kentañ e oa da Maurice Denis da zont betek Su Kerne, da-geñver vakañsoù gant e familh... Dont a reas en-dro e 1905 war-lerc'h marv Gauguin ha mont a reas e pirc'hirinaj asambles gant Sérusier war al lec'hioù a blijed da Gauguin, De Haan, ha kalz re all. Georges Lacombe, a voe graet « an nabi kizeller » anezhañ, hag a reas pennzelwennoù Paul Sérusier ha Maurice Denis, a zibabe alies tem ar c'hoad en e livadurioù. Peurvuiañ e vez kavet un tamm kevrin enne.



En daolenn **Breton o tougen ur bugel**, savet e 1894, e weler ar gwez troc'het a ra un dalenn digustum a-dreñv ar skeudenn greiz, ar pezh a ra d'ar sellerien santout e-giz pa zeufe an iskisted e-barzh ar bed gwirion. Gant **Mougev e Kameled** savet war-dro 1890-1897 e weler levezon ar stampoù japanat. Sevel a reas ivez morlivadurioù e-leizh, levezonet kalz gant ar japanouriezh, ken e voe skrivet gant un arzvarnour flemmus : « *Faltaziennou an ao. Lacombe a ya en tu all d'ar bitrakoù sinaat permetet.* » Amañ e c'haller gwelet en doa dibabet Lacombe, e-barzh an arz japanat, an tresoù, an troc'hoù splann ha c'hwek, er c'hontrol d'an touchennoù trivliadour lufrennaouus. Mignon tost e oa da Paul Ranson, a zo diskouezet koadlivadurioù gantañ er sal-mañ. Savet int bet diwar linennoù kromm diouzh ar c'hiz japanat

Teirved Estaj - Sal 14

Teknikoù ar stampoù

Kinnig a reer deoc'h, er sal-mañ, gwelet arz ar stamp e-giz ma vez pleustret hiziv an deiz gant un heuliad c'hwech film berr, enne pep a zisplegadenn diwar-benn un teknik krouiñ.

Evit ar stampoù japanat e vez graet gant teknik ar c'hoadengravadur, da lavaret eo engravañ war goad. Peurvuañ e vez implijet seurtoù koad kalet, evel koad kerez pe katalpa, troc'het hag engravet a-du gant gwiad ar c'hoad. E-giz kement teknik a zo en dez ar prennengravadur ul levezon war ar stil. Rak gant ar prennengravadur e reer kentoc'h gant an trolinennoù hag al livioù a-blat, ar furmoù sintetek, al linennoù gwevn. Pouezus-kenañ eo al livioù : degas a reont al lusk, gante e vez stummet an egorenn ha lakaet an ec'honnennoù war wel. Graet e vez un dresadenn gant un arzour : roet e vez honnezh d'un engraver hag a sav ar vamm-voull a-vos. Evit ur stamp liesliv e ranker prientiñ a-wechoù betek un dek plankenn koad bennak, unan evit pep liv : war bep planken ne lakaer nemet ar pezh a sell ouzh ul liv hepen. Goude-se e vez tennet ar stamp gant ar mouller : da gentañ e vez moulllet an tresoù a laka ar furmoù war wel. War-lerc'h e vez lakaet an amprouenn-se war pep planken bet lakaet liv warnañ gant ur vroust berr he blev. Choazet e vez al livioù asambles gant an arzour.

Evit ar maendresadurioù e vez graet gant ur vamm-voull vaen, e maen-raz fin-tre e c'hreun alies. Gallout a reer tresañ war ar maen war-eeun gant ur c'hreion pe gant liv maendreserezh. Gallout a reer ivez kalkiñ an dresadenn. Goude-se e vez glebiet ar maen evit moullañ : splu eo, gant se e chom an dour enni. Neuze e vez ledet al liv war e c'horre. Chom a ra al liv lec'h m'emañ an tresoù druz ha boutet e vez kuit eus al lec'hioù all gant ar glebor ; e-giz-se, goude bout gwasket war ar follenn ne zeu nemet an dresadenn a-wel warni. Ezhomm e vez d'ober gant ur maen disheñvel evit pep liv.

Abred-tre ez eus bet implijet skoroù metal e-plas ar vein a zo diaes ober gante. An dour-kreñv pe akwatint zo un teknik da engravañ war plakennoù metal gant trenkenn. Goloet e vez ar blakenn gant gweris d'engravañ hag a vez treset ar skeudenn ennañ gant an arzour, gant ur goustilh. Goude-se e vez lakaet ar blakenn da soubañ en drenkenn hag a grog er metal lec'h m'eo bet tennet ar gweris ha dont a ra an dresadenn war wel. Peurliesañ e vez implijet kouevr pe zink ; neuze e vez graet zingengravadur eus-se.



André Jolly, Bonne année 1915. Quimper. Dépôt des convalescents, 1915

Teirved Estaj - Sal 15

Jean Deyrolle

War-lerc'h bout kroget gant al liverezh skeudennus klasel e oa aet Jean Deyrolle, mab-bihan d'al livour dreistrealour Théophile Deyrolle, warzu an difetisted rik, broudet ma oa gant ur youl ennañ merket gant ar speredelezh. Ganet e oa e Nogent-sur-Marne e 1911 en ur familh a orin eus Breizh, bevet en doa e vugaleaj e Konk-Kerne.

E 1929 ez eas er skol Arz ha Bruderezh e Pariz. Ur wech tapet e ziplot gantañ e tilezas bed ar bruderezh ha distreiñ a reas da Konk-Kerne. Krog e oa neuze da liveañ ha da veajiñ e Breizh, eus an eil penn d'egile, ober a rae raktresadennoù eus divuhezennoù ha maeziadoù. War-lerc'h bout bet ur pennad amzer e Maroko e tistroas da Frañs e 1938 hag en em stalias e Konk-Kerne adarre, ma c'halle implijout atalier e dad-kozh. Dont a reas d'anaout oberennoù Paul Sérusier ha diwar neuze ez eas alies da welet e intañvez Marguerite e Kastell-Nevez-ar-Faou evit studiañ e daolennoù hag e skridoù.

E 1944 e krogas Deyrolle gant an difetisted ; dont a reas da vout mignon gant Alberto Magnelli ha levezonet e voe kalz gantañ a-fet speredelezh, hag ober a reas anaoudegezh gant ar balierourez parizian Jeanne Bucher a brenas e daolennoù difetis kentañ digantañ.



E 1945 e kemeras perzh e Saloñs ar *Surindépendants* hag er bloaz goude e oa er strollad livourien difetis a oa en em vodet en-dro da balier Denise René, asambles gant Gilioli, Poliakoff ha Vasarely. Er bloavezhioù 50 e oa muioc'h a frankiz gant e stil : ezteuler a rae e nerzh dre un teknik liveañ milzin, dre livioù blizidik, dre c'hoari gant an tresoù hag an tonioù evit souplaat ar strizhder furmel. Aozet ez eus bet kalzik diskouezadegoù diwar e benn e Frañs hag e broioù all.

Teirved Estaj - Sal 15



Oberennoù Jean Deyrolle

Emboltred gant ar wezenn-fiez savet e 1941 hag **An Deskaouaerez Heiz** e 1942 zo taolennoù pouezus-tre e-barzh oberenn Jean Deyrolle, an tremen etre skeudenniñ ha difetisted. Santout a reer splann aze levezon Paul Sérusier, d'ur mare ma veze alies Deyrolle e Kastell-Nevez-ar-Faou. Heuliañ a reas meur a deorienn savet gant Sérusier : en em harpañ war an niver aour, implijout an tempera, reolenn ar c'henliv diazezet war ar gris livet hag an div livaoeug disheñvel, unan evit an tonioù tomm, eben evit an tonioù yen, kuit da veskañ ar pigmantoù. Daoust ma oa bet levezonet da vat stil ha stumm oberennoù Deyrolle gant Sérusier e-pad un trivec'h miz bennak hepken, e santer pouez an hini a oa e penn an Nabied war e oberennoù goude.

Amañ ez eus div daolenn eus ar bloavezhioù 60 a weler warne an tremen d'an difetisted rik ; **Hernet, opus 637** a oa bet savet da goulz an trede maread difetis, etre 1954 ha 1965, ma oa muioc'h a frankiz en e arz : dijuntet eo an traoù, mont a reont d'ober ur framm follennet e-giz maenadoù melezhour, drailhadoù skilt. Eno e santer ar poell, al luskoù stag ouzh al livezh difetis hag a zo disheñvel-mik diouzh luskoù ar skeudenniñ. Gant **Ovide, opus 850** savet e 1966 eo e-giz pa vefe stign an traoù ken e vountfent a bep tu ; ur galonenn a seblant tarzhañ evit dispakañ he gouelioù.

Gant ar gwiskadoù livioù treuzwelus dereziet tamm-ha-tamm e teu fiñvadennoù a weler a-boan hag a zegas buhez en talennoù. Taolet e vez ur gouloù gwanaet gant an oberenn : seblantout a ra dont eus deun an danvez.

Teirved Estaj - Sal 15



Evit klozañ

Pont-Aven liammet ouzh Gauguin hag an arzourien a oa d'e heul zo gwirion hag ijinet war un dro. Bet e oa an dachenn m'en em gavas an arzourien-se, deuet eus lec'h all, a-dal lec'hioù hag ur sevenadur dianav dezhe ha, dreist-holl, bet e oa evite an dro da vont dreist ar wirionez-se, da ezteuler ar pezh o doa e deun o c'hreizon. E-giz-se, tremen e Pont-Aven en deus lakaet anezhe da vout diazezerien al liverezh vodern, ha dalc'het e oa bet gant an hent-se gant arzourien evel Jean Deyrolle. Ha Gauguin a lavare dezhe : « *Breuteur, na zezrevellit ket ar re all. En em zeraouit hoc'h-unan. Kit ennoc'h war gil betek gwic'hadennoù ho kanedigezh...* »

Gwelet e vez levezon Skol Pont-Aven dre ar pezh a zo bet krouet war he lerc'h. Pe e vefent Faovourien, Ekspresourien pe Difetisourien en XXvet kantved, komprenet e oa bet mat gant arzourien al luskadoù disheñvel-se an traoù pouezus-kenañ a oa bet degaset gant Paul Gauguin hag e genseurted : taolenniñ un dra wirion bevet en tu all d'ar pezh a c'haller gwelet ha mont dreist ar sujed evit tizhout gwelloc'h ar mennozh pe ar from.

Bremañ eo poent deomp kimiadiñ ha pediñ a ran ac'hanoc'h da vont da vale e Pont-Aven hag en trowardroioù betek al lec'hioù a zo bet kaoz anezhe, abalamour deoc'h da santout ar gouloù, al livioù hag ar furmoù a zo deuet diwarne an taolennoù ho peus gwelet amañ.